

250

Da Loue,

Evit supplicia e Vajeste Divin da zont da lagat fin d'ar glao
 pehini na boaez da goea abaeue pell-amzer, ha da accordi
 demp eun amzer favorabl evit ober an Eost.

(262, suite)

Vor ton Gierz ar Vamm general.

Crouer an Ee hac an douar
 Hor zelouit en hor glac'har;
 Teulit eul lagad truezus (263)
 Vor ho pugalet maleurus.

Hon douarou zo distrempet,
 Gant ar glao bras a goe bepret.
 Eur spont vras zo en hon touez oll,
 Rac non e teufe 'n Eost da goll.

Dêc'h hepen en en adressomp;
 Rentit an esperanz demp;
 Dêc'h, Autrou, hon deveus recouss:
 Deurweit, mar plich, hon zicour.

C'houi zo gür Dad d'ar gristenien;
 Selouit ho crouadurien.
 Protector oc'h d'ar maleurus,
 Bezit evidomp generus.

An Tol, al Loar, hac ar stered
 Oc'h eus format evit ar bed;
 An ezen dom, an oll fleurion
 Eus ho calloud a zo testou.

An hedou en hor parqeyer,
 Ar foennou en hor prajeyer,
 Al lapousset gant o chanion, (264)
 Ar pesget en fonz ar mörion,

An avelic douz a greiz-de,

Frestadur an Amzer - neve,
 En amzer an Eost, an donder,
 Danvez bras an Discar-Amzer.

Ar fleur, ar frouez er jardinou,
 Ar plant, ar gouez er forestou,
 Brasder ar mör hac an douar,
 Zo preuennou eus ho pouvoar.

Repos an natur, er gouân,
 Eur mintinvez caer eus an hân,
 Tomdez buezec ar c'kreiz-de,
 Doufder abardaerz caer ive.

Urz ger parfet a bep sezon,
 Eus ho calloud testou gürion;
 C'houi lavar d'ar mör en frouden:
 « Arrêt!... » ha dioc'h-tu ne flach gen.

Tranquilité an nosvezion,
 Structeur ger parfet hor c'horfou,
 Donezonou hor pemp sqiant (265)
 Zo testou ezoc'h oll-buisant.

Phijedur eur vue dirlam,
 Eur c'housquet tranquil ha dinam,
 Ar joa eus eun difun content,
 Doufder eur garantez constant.

Eur gundu bur, eur yec'hed mad,
 A ra ar boneur en peb stat,

An unvaneg en tiequeg,
Eus eur mignon ar vadelez.

Gement oll a zo endro deomp,
Hac a zo corret mad ganeomp.
Hon tad, hor mam, hor breur, hor c'hoar,
Hor pried, hor bugale hor c'har.

An boued a bini 'n'em vagomp,
An er vod pini a zantomp,
Zo oll preveznou da james
Evidomp eus ho madelez.

(266) An oll dud oc'h eus bet crouet
O deus en peb feçon rentet
Homach d'ho qer divent bræder
En peb lec'h hac en peb amzer.

Mes ni, pere zo qen eurus
Da adori ho Mab Jesus;
Ni pere zo quir Gristenien,
Hac a vezo da virriqen,

Ni deu, deus a fonç hor c'halon,
D'eq em strinca ouz treid ho tron,
Da implori ho madelez
Evidomp-ni, pec'herien qez:

Sellit hon draounien a vizer,
Distrempet gant an douequer;
Hor zicourit dre ho puissanç:
Ennoc'h e man hon esperanç.

Lagit fin d'ar glaequer bras
A deu d'hon deçpli, sivoas;
Digasit hoc'h eol beniquet,
Hac an amzer gaer, ni ho ped.

(267) Harpet var ar Religion,
Zo engravet en hor c'halon,
Doue n'hon abandons qet,
Mar er pedomp gant feiz parfet.

Rentomp eta enor ha gloar
D'an Drinded Sacr, var hon douar,
Melodi d'an Tad Eternel,
D'ar Mab ha d'ar Spered-Santel.

Hac c'houi, Mari, Mam d'uegus,
Sellit ouz hor stat truegus:
Obtenit disuz ho Mab divin
Ma vo d'ar glaequer bras fin.

A. Lédan.

(Vol. VII, p. 262-267.)
strophes non numérotées.

cf. plus haut p. 106-108.